

# KLASKIT AR WIRIONEZ

Komzou : Job an Irien

Muzik : Mikael Skouarneg

*J = 88*

**Klas-kit ar wi-rion-(n)ez, Ma fell deoc'h be - za prest**

**'Vel eun tamm dou - ar mad Da zi - ge - mer an had!**

**1,2,3,4 Se - la - ouit, se - la - ouit mad, Se - tu an ha - der o teu - ler had!**

**1.Hag ar greun, war vord an hent, 'Zo koue - zet 'kreiz ar boul-trenn;**  
**2.Hag ar greun e - kreiz ar vein En eun taol 'zo di - wa - net;**  
**3.Hag ar greun, tao - let a - hed 'Kreiz ar spern a zo koue - zet;**  
**4.Hag ar greun, en dou - ar mad A zao kaer e - vid rei had;**

**Rit... D.C.**

**1.Hag ar Gomz 'zo eet da get Dre - bet gand al la - bou - sed.**  
**2.Hag ar Gomz 'zo eet da get Gand'n heol tomm eo bet de - vet.**  
**3.Hag ar Gomz 'deus ket kres - ket, Gand ar spern eo bet mou - get.**  
**4.Hag ar Gomz a c'hell kres - ki 'Vel eun eost o ta - re - vi.**

*Diskan :* **Klaskit ar wirionez,**  
**Ma fell deoc'h beza prest**  
**'Vel eun tamm douar mad**  
**Da zigemer an had !**

1. Selaouit, selaouit mad,  
Setu an hader o teuler had !  
Hag ar greun, war vord an hent,  
'Zo kouezet 'kreiz ar boultrenn ;  
Hag ar Gomz 'zo eet da get  
Drebet gand al laboused.
2. Selaouit, selaouit mad,  
Setu an hader o teuler had !  
Hag ar greun e-kreiz ar vein  
En eun taol 'zo diwanet ;  
Hag ar Gomz 'zo eet da get  
Gand 'n heol tomm eo bet devet.
3. Selaouit, selaouit mad,  
Setu an hader o teuler had !  
Hag ar greun, taolet a-hed  
'Kreiz ar spern a zo kouezet ;  
Hag ar Gomz 'deus ket kresket,  
Gand ar spern eo bet mouget.
4. Selaouit, selaouit mad,  
Setu an hader o teuler had !  
Hag ar greun, en douar mad  
A zao kaer evid rei had ;  
Hag ar Gomz a c'hell kreski  
'Vel eun eost o tarevi.

**CHERCHE LA VERITE**

*R: Cherche la vérité,  
Si tu veux être prêt  
Comme un peu de bonne terre  
A recevoir la semence !*

1. Ecoutez, écoutez bien,  
Voici que le semeur jette la semence !  
Et les grains, sur le bord de la route,  
Sont tombés dans la poussière ;  
Et la Parole a disparu,  
Mangée par les oiseaux.
2. Ecoutez, écoutez bien,  
Voici que le semeur jette la semence !  
Et le grain parmi les pierres,  
D'un seul coup, a germé ;  
Et la Parole a disparu,  
Brûlée par le chaud soleil.
3. Ecoutez, écoutez bien,  
Voici que le semeur jette la semence !  
Et le grain jeté le long,  
Dans les épines est tombé ;  
Et la Parole n'a pas grandi,  
Les épines l'ont étouffée.
4. Ecoutez, écoutez bien,  
Voici que le semeur jette la semence !  
Et le grain, dans la bonne terre,  
Pousse bien pour donner semence ;  
Et la Parole peut grandir  
Comme une moisson qui mûrit.